


MIKAEL
BAUDU

TARZH



skrid 29

MIKAEL BAUDU

TARZH

TRESADENNOU GANT SYLVAIN BRISSON

- Pep gwir miret strizh -

SKRID 1981

MIKAELE BAUDU

TARZH

WREYER MIKAELE BAUDU

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ LEZENN
PEVARE TRIMIZIAD 1981

TI-MOULAN PREVEZ
RENER : GW.DENEZ

KOUMANANT EVIT 4 NIVERENN : 30 LUR

CHOMLEC'H : G.DENEZ, RI, PLOARE
29100 DOUARNENEZ

PRIZ AN NIVERENN-MAN : 8 LUR

CCP DENIS 1499 51 ROAZHON

GWERZ SEIZH HUN AN EIL

Araok an deiz kentañ
Ne oa nemet an Douar hag an Neñv.
Goullo ha didud e oa ar bed
Ha dinamm e beurdeñvalijenn.

Yen e oa korf an EIL,
Divuhez evel maen,
Peurgousket e penn an hent
Abae
A-holl-viskoazh.
Pe adalek bremañ kentoc'h
Rak deus an amzer ne oa ket c'hoazh.

An Heol o sevel,
E sklerijenn o c'henel,
Gwrez an tan o tommañ ar c'horf noazh,
E galon o kregiñ gant e lamm kentañ.
Hag ar gwad da redek en e wazhiennoù.
Ur fulenn o strinkañ.
Tredan o c'haloupat a-hed an nervernoù,
Hag ar molekulennoù da lampikat
A sinaps da sinaps.
Fulenn ar vuhez o flistrañ
E kondonioù e empenn.
Savet an avel en e skevent
Hag e vruched da sevel ha diskenn,
Un aezhenn glouar o c'hwezhañ dre e fronelloù.
Hag e zaoulagad o tigeriñ.
Ur vrec'h o fiñval....
E benn o sevel
Deut eo d'ar vuhez.

Sevel a ra an Eil,
Yaouank ha kreñv,
Sonn ha kadarn
Kroc'hen e gorf noazh
Flouret gant skinoù an heol.
Hag e vlev hir o nijal
E-barzh en avel.
Avel ar mintin kentañ.
Gwenn eo e vemor,
Dinamm e ene.
Hag eñ da dapet penn an hent.
Kerzhet a ra
Dillo ha diskuizh
Ur mousc'hoarzh war e c'henou
E zaoulagad c'hlas o lugerniñ.

E penn an hent all
E kerzh Egile
Ken dillo ha ken diskuizh all
Ur mousc'hoarzh war e c'henou
E zaoulagad zu o lugerniñ.

D'ar c'hroaz-hent e tegouezhont,
Pep hini diouzh e du.
Met goustatoc'h ez eont.
Hag int da chom a sav,
Pep hini diouzh e du,
Ha setu anezhe en o sav.
An Eil o sellet ouzh Egile,
Egile o sellet ouzh an Eil.
En ur fent a gasoni
Eo troet o mousc'hoarzh.
Daoulagad zu, daoulagad c'hlas.
Ha diouzh bruched pep hini
Ur youc'hadenn vraouac'hus,
Ur yudadenn spouronius
A sav en ur dregerniñ.
Lamm a ra an Eil war-du Egile,
Lamm a ra Egile war-du an Eil.
Taer eo ar stokadenn,
Didruez an Argad,
Taolioù dorn, taolioù troad,
Taolioù dent, taolioù penn.
C'hwezh ha gwad,
Gwad ha c'hwezh,
Gwad ha gwad

Sevel a ra an Eil.
Ouzh korf marv Egile emañ o sellet.
Kroc'hen saotret,
Kostezennoù torret,
Daoulagad diframmet,
Empenn ha gwad
Stag ouzh ar blev stlabezet,
Divgell flastret en ur poull gwad....
Hag e vouzelloù
O tont er maez eus e gorf.
Sellet a ra ouzh ar c'horf
Hag e kouezh war e zaoulin,
Moustret e vouzelloù
Gant ar c'hoant rechetiñ.
Dour a zeu d'e zaoulagad,
Ne c'hell mui gouzañv liv ar gwad.
"Petra 'm eus graet, petra 'm eus graet".
Gouelañ a ra.
Leñvañ a ra.
Hag eñ da dorimellat
Er vestl en deus chetet
Er gwad en deus skuilhet.
Hag an heol da guzhat
Lihserioù ruz o wiskañ liv ar c'hañv,
Kañv an noz kentañ.

Deut eo ar sklerijenn en-dro
An heol o parañ en oabl,
Oabl glas an eil deiz ...
Kerzhet a ra an Eil,
Gwenn e vemor,
Dinamm e ene ?
Kerzhet a ra
Diskuizh ha dillo,
Ur c'hroc'hen arzh war e gein,
Un vouc'hal vaen en e zorn.
Kerzhet a ra
Betek ar c'hroaz-hent ...

Emañ o ouelañ
Pa guzh an heol,
Pa zeu an eil noz,
He zeñvalijenn o skoachañ
An daou skeud,
An daou deuz,
Saotret an Eil hag Egile
Gant gwad ha bestl.

Tarzheth eo an trede deiz.
Kerzhet a ra an Eil,
Gwenn e vemor,
Dinamm e ene ?
Mont a ra,
Ur c'hleze, start en e zorn.
Lugerniñ a ra an dir,
Dir al laonenn o skediñ,
Sked o strinkañ.
Hag ar gedourien da youc'hal,
Hag ar youc'hadenn da dregerniñ.
Stok ha stok e sko an dir,
Kleze an Eil gant kleze Egile,
Kleze Egile gant kleze an Eil.

Yudal a ra d'e vreur lazhet,
Mastaret gant ar gwad skuilhet
Pa guzh an heol,
Pa serr an trede noz.

Mont a ra an Eil,
E vantell zir o lugerniñ
Titiriñ a ra e son sklintin
O tregerniñ d'ar pevare mintin
Emañ an Eil o varc'hegañ,
Lorc'hus ha kadarn,
Sonn war e varc'h,

Start e c'hoaf en e zorn,
Ken gwenn e vemor
Ha ken dinamm e ene ?

Ar pevare noz hag he zeñvalijenn
A zo serret er c'hroaz-hent.
Ar gwad a zo naetaet,
Ar more'hed a zo gualc'het.

D'ar pempvet deiz
E stlak fuzuilh an Eil.
Hag e vaionetezenn da zivouzellañ
Ha da zifaragouilhañ
Ha da doullgofañ.

Dadadadav a ra ar vindrailherez
O stlakañ d'ar c'hwevet deiz.
Hag an deñvalijenn c'hlan
Da zinammañ
An torfedoù
Hag ar pec'hedoù.

An Heol o sevel
E sklerijenn e c'henel,
Emañ goulou ar seizhvet deiz,
O parañ en oabl glan.
Mont a ra an Eil.
Pep hini diouzh e du,
Pep hini gant e c'hwil du,
Stiur e garr-emgann
Start etre e zaouarn.
Emañ o lugerniñ
Dir ar mekanik,
Buket e galc'h,
Prest da flistrañ.

Mont a ra, asur,
Kadarn ha lorc'hus,
Gwenn e vemor
Ha dinamm e ene ?
War raok, war raok,
Mestr an Douar hag an Neñv.

D'ar c'hroaz-hent e tegouezhont,
Pep hini diouzh e du,
Met goustadik ez eont.
Hag int da chom a sav,
Pep hini diouzh e du.
Ha setu int en o sav,
An Eil o sellet ouzh Egile,
Egile o sellet ouzh an Eil.
Daoulagad zu, daoulagad c'hlas.
Ha diouzh kalc'h pep hini,
Ur flistradenn vraouac'hus,
Ur strinkadenn spouronus
A sav en ur dregerniñ.

Tarzhañ a ran an Eil.
Tarzhañ a ra Egile.

Hogen ne darzho ket an eizhvet deiz.

RUZ-GWAD E KUZHAS AN HEOL

Goustadik e kouezhe an heol ruz etre ar rideozioù alaouret strignet a-us d'ar menezioù, ar skramm teñval war-sav dirak un dremmwel tan. Mont a rae war hiraat ar skeudoù oc'h en em astenn tamm-ha-tamm war ar reier a lugerne c'hoazh, e-touesk reustl an torgennoù. Tost achu e oa an arvest meurdezus a veze c'hoariet gant an natur, bep abardaez, hep den ebet ken evit sellout outañ. Hep den ebet ken evit ma tiwanfe en-dro e-barzh e spered, ar c'hantadoù a gorriganed a c'haloupe gwechall a-hed hag a-dreuz ar menezioù, e-mesk ar skeudoù kevrinus. Ne chome ket zoken tres an hini en doa troet ar vro en un dezerzh marv ha gouez, hep netra ken o fiñval war an torioù hag ar c'hribennoù digompez, ma ne vefe torchadoù geot a-strew e-touez ar mein. Lakaat a raent un tamm buhez e-barzh ar gweledva difiñv. Sevel a raent uhel en ur grennañ dindan gwask un aezhenn vihan, nemet e lec'hioù 'zo ma oant bet pilet. Bez oa aze ... evel roudoù bet lezet gant ar chadennoù a vez lakaet war c'horre rodoù eus mekanikoù 'zo a vez gwelet e-barzh ar c'hêrioù. Mont a raent o kildroñ betek kern uhelañ ar menez. Pintet e oa eno karrigell c'hlas ha lufir an Ankou Mod Nevez, ur pezh korzenn zir warni buket en nec'h, evel ur c'hastr sa-

vet trema an nefv, liv ar gwad. Amañ e oa annezad diwezhañ ar menez. Gortoz a rae an noz hag ar marv, ur c'horoll skeudennoù o tibunañ e-barzh e spered.

Luc'hed trellus a ziflake diouzh an tarzhadegoù bouzarus. Tennoù fuzuilh ha strakadegoù mindrailh-erez a zistone a-bep-tu. Difoupañ a rae broudoù ar marv o c'hwitellat en aer a-raok tizhout o fal e-kreiz ur saotr ruz. En em zifretañ a rae e-touesk ar safar, o roiñ urzhioù en-dro dezhañ, o klask kas war-raok e soudarded pennfollet. Diroll e oa evel un diaoul, o tiskargañ e revolver war-zu neuzioù gwenn brezelourien an dezerzh "Bec'h de'i paotred !" Dont ' ray 'r maout ganeomp !...." Lamm 'vo roet dê... Mil c'hast !" Kabalat 'rae e-kreiz ar bec'h o jestraouñ evel ur jañ-blev. Ur flemm a dreantras e galon, a-greiz-holl. Ha netra ken .. mann ebet ...

"Marv eo evit ar vro ar Jeneral Kadored. Kouezhet eo e-barzh un toull-strap bet stignet gant emsavidid en ur c'hornad eus an Afrik".

Gouleier un daolenn elektronek a welas da gentañ, pa zihunas, ha neuze Mekanikoù iskis strewet un tamm e pep lec'h. Kaer en doa sellet en-dro dezhañ ne verze ken 'met ardivinkoù a bep seurt, hag ur strobac ofisourien dirazañ, met ne gave ket e gorf. Ne sante ket anezhañ ken zoken. "Mont a ra Aotrou Jeneral !", eme unan eus an ofiserien. Arabat deoc'h bezañ trelatet gant 'pezh 'maon o vont da laret deoc'h. Souezhet bras e voc'h ha n'ouzon ket re vat penaos kontañ deoc'h 'pezh 'zo degouezhet Ur soudard on evel doc'h ha n'on ket boazet d'ober prezegennoù bras Setu ... 'maon o vont da laret deoc'h ar wirionez krenn ha krak".

"Deut eo a-benn kenlabour hon surjianed hag hon

teknisianed da zegas ho spered en-dro d'ar vuhez. Im-
boudet eo bet ho empenn war hon gwellañ karr-emgann
nukleel !....."

Dalc'her a rae an ofiser da gaozeal met ne se-
laoue ket anezhañ ken, ken strafuilhet ma oa....

Lorc'h a veze ennañ pa soñje e oa deut da vezañ
galloudusañ den an douar a-bezh. Ar galloudusañ den ?
Daoust hag e c'helled ober un den c'hoazh eus an euzh-
den elektronek-se ? Plijadur en doa bet er penn-kentañ
oc'h ober anaoudegezh gant e skiantoù nevez, kant
gwech gwelloc'h evit ar re en doa bet a-raok : e weled
gouest da verkañ n'eus forzh peseurt munud, e glevet a
c'helle merzout an disterañ hiboud, meur a gilometr
dioutañ, hag e radar dreist-holl a souezhe anezhañ ar
muisañ tout. Sevel 'rae ennañ ar santimant da vezañ
dreist d'ar re all !

Koulskoude, daoust da se en doa poan d'en em
roñf d'e vuhez a benitiour. Kaset e oa bet e-tal ar
mor, e-barzh ar menezioù kozh, e kornog ar vro. Aze
e ranke gortoz e-unan, peogwir e vefe e-unan-penn pa
vefe dav dezhañ kas da get an enebour. An arm diwezhañ
e oa, an hini a oa sañset bezañ lakaet e-barzh ar
jeu pa ne vefe ket moaien ken ober mod-all, ha d'ar
c'houlz-se ne chomfe den ebet ken evit sikour anezhañ.
Chañs diwezhañ ar vro an hini oa. Met den ne ouie re
vat peseurt reuz a c'hellfe ober e vombezenn.

Kantren a rae a-hed hag a-dreuz ar menezioù di-
dud ha divuhez. Troc'het e veze an didrouz peurbadus
gant stirlink e chadennoù ha storlok e votor. Pell oa
dija e oa bet skarzhet kuit an dud diwezhañ a zalc'he
dizesper da dalañ ouzh an amzer da zont, o klask gounit
o zamm kreun war-bouez troc'hañ buzhug 'barzh ar park-
eier distuz ha mesañ deñved war an torgennoù bras. Ne
oant ket kalz ken, al lod brasañ eus an dud o doa tapet

o feadra dija hag e oant aet trema ar gêr vras, war-zu
ar sav-heol. Bec'h en doa bet ar gouarnamant memes-
tra gant an istrogelled diwezhañ. Mennet-start e
oant ha ne faote ket dezhe dilojañ. Dav e oa bet kas
an arme zoken ! Ne oa ket chomet pell goude-se, al
loened gouez. Marv oant tout ha den ne ouie perak !
Lod o doa laret e oa ar restachoù nukleel, bet interes
e-barzh ar mengleuzioù a oa kaoz. Met den ebet n'en
doa studiet an afer morse : ne oa ket dav kaout loen-
ed gouez 'barzh ar menez evit lakaat soudarded d'en
em roñf d'ar brezel. Forzh penaos oa bet kavet
lec'hioù-all evito dibaoe.

Diaes e oa bet a-wechoù gouzañv an digenvez.
Ne gave ket kalz a ziduadennoù e-barzh an dezerzh-se.
Dreist-holl er penn kentañ ! Gant an amzer en doa
desket da brizañ traoù 'zo. Ar c'huzh-heol da skouer,
pegen dispar e kave ar menezioù pa veze entanet ar
c'houmoul ! Koulskoude e oa plijadurioù a vanke
dezhañ hag e save c'hoantoù ennañ a-wechoù. Dont a
rae ar soñj dezhañ eus kroc'hen flour ar merc'hed,
gant o divronn a skrije dindan e flouradennoù. Sant-
out a rae dre e soñj ar gridienn c'hwek a rede war
c'horre e gein, ar glizi tomm a stroñse e gorf pa oa
eñ o tiskargañ e vuhez e-barzh kokouzenn hej-dihej ur
plac'h o fuc'hañ he bizied diroll o tremen tro ha tro
eus e gein d'e zivorzhed. Santout a rae tefvalijenn
domm he gaolenn, devet gant tan e flemm ruz a lakae
an daou gorf da skrijañ asambles. Met un hufvre e oa
deut da vezañ ar santadoù-se, evel an holl re a vez
gant korf un den. Ne verze ar bed ken 'met dre ski-
antoù ur mekanik yen hag euzhuz. Daoust d'e c'halloud
divent war vuhez an holl ne c'helle ket kaout ken ar
pezh a veze gant an disterañ den.

Ar gouelec'h, ar reier kras, un dezerzh mein...

Ur bed divuhez, e hollved a zigenvez, da viken, evit ar peurbad Ur seurt paria e oa deut da vezañ. Ul lovr a veze lakaet a-gostez gant ar gumuniezh a oa sañset bezañ dindan e warez. Ar gevredigezh-se en doa troet anezhañ en ur mekanik, un ardivink digizidik ha diseblant na verze e en-dro nemet dre yenijenn e skiantoù artificiel. Ne ouie ket re vat hag-eñ e oa truez peotramant kasoni a vage ouzh ar re a oa kiriek eus e vac'hagnadur. Rak, daoust d'e stad, a gave truezus, n'en doa ket kalz gwarizi evit paour kaezh tud ar gêr vras.

Ar re-se o doa kollet muioc'h evit ur c'horf kig, o spered den o doa kollet. Deut oant da vezañ evel robodoù diseblant, hep liv perzhioù mab-den warne. A-benn ar fin e kave anezhe mac'hagnetoc'h c'hoazh, evitañ, rak dalc'het en doa eñ ur spered den gantañ. Daoust d'e neuz diavaez e tiskoache ennañ muioc'h a zeneliezh evit na oa bet e-pad e vuhez tremenet. Ne oa ket ken ar c'hrouadur digar ha diboell a veze kaset gwechall e-barzh an Afrik, da blantañ urzh bleizi ar gêr-vras e-touesk ar re baour hag ar re zister. Kompren a rae ar re-se bremañ, deut da vezañ brezelourien evit gallout chom mestr war o buhez ha bevañ en o mod. Ar memes gouenn tud e oant evel an istrogelled diwezhañ a oa chomet e-barzh ar menezioù. Tud manet tost eus an natur, leun a enor hag a resped evit ar vuhez. Hag an holl zeneliezh a oa bet enne a ziwane en-dro ennañ, bremañ, tra ma oa eñ e-unan e-barzh korf ur mekanik euzhus.


Annezad diwezhañ ar menezioù an hini oa bremañ. Ennañ e oa savet ar c'hoant da veñjañ e holl vreudeur bet lazhet gant re kêr. Kantreet en doa diroll, a-hed hag a-dreuz ar menezioù kras ha divuhez o c'hortoz ar c'huzh-heol. Ar follentez krog en e spered ... A-benn en doa kroget an heol da c'hwezhañ an tan e-barzh an neñv, en doa pignet war gern uhelañ ar menez. War ar

gribenn a veze graet Tuchenn-Sant-Mikael deuzouti gant an dud a chome eno gwechall. Deut e oa mare ar veñjañs.

Difiñv e oa tolzenn c'hlas ar c'harr-emgann, daskedoù ruz-gwad an dremmwel tan o lurgerniñ warni. Sellout a rae ouzh ar gweledva meurdeus evit ar wech diwezhañ. Tamm-ha-tamm e tiskenne an deñvalijenn war an torgennoù kras ha goustadik e troe war-zu al limes-tra, liv ruz an neñv. An heol a guzhas e-touesk reustl ar reier, lonket gant den ne oar peseurt sarpant. Buket e oa ar c'haezour dir trema an oabl teñval... Gant ur fuc'hadenn boud e strinkas ar marv.. Taniet e voe an dremmwel en-dro, deus kostez ar sav-heol ar wech-mañ. Ur safar bouzarus a zistone en diabell. Luc'hed aour a strinke a-bep-tu, goustadik e save ur mell-tog-touseg liesliv a zigase e sklerijenn d'ar menezioù teñval.

Loc'hañ a reas ar c'harr-emgann neuze, hag e fardas a-benn-herr war un diribin serzh. Ruilhañ a reas d'an traoñ, evel ur voull-gurun o flammañ a-hed an dinaou teñval.

Ur peoc'h peurbadus a rene war ar menezioù divuhez. Deut e oa en-dro an deñvalijenn goude ar c'huzh-heol ruz-gwad.



AL LAPOUS

Kuzhañ a rae an heol erfin ... Tamm-ha-tamm e tave an taolioù-kurun. Tremen a rae koumoul ruz digoret a-us d'ar gwez marv hag ar geot melen. Distonañ a rae an tarzhadegoù diwezhañ a-raok ma serrfe an noz. A-benn neuze e vefe sioul rouantelezh teñval ar gwesped ruz hag an teredez. Sevel a rae skeud ar soudarded war mogerioù tev ar c'hastell. Ne zalc'hent ket ken o fuzuilhoù gant kement a evezh hag e raent diouzh ar mintin. Krogadoù hir an devezh o doa skarzhet kuit perzh al louzou-diskuizhañ. Ezhomm en doa o spered da ankouaat ar poanioù kriz a doa gouzañvet a-hed an devezh. Kroget e oa ar goulioù da vreinañ dindan ar palastroù plastik hag ar bandennoù c'hwez-vat. Flaer a save a-ziwar ar gloazadennoù gloriüs. A-benn ur pennadig e c'hellfent disterniañ ha diskenn e-barzh toullou-don ar c'hastell. Eno e c'hellfent ankouaat. Dont a rafe ar robodoù medisin da zistanañ o goradennoù gant louzou burzhudus a skarzhe kuit ar boan hag ar flaer evit un devezh-pad. Diouzh ar mintin e krogfe en-dro ar gadourien gant an emgannoù na vefe fin ebet dezhe. Pegañ a rafent en-dro e-barzh ar c'hrogadoù taer hep kaout soñj ken nag eus an argadoù nag eus korfoù devet o c'hamaraded nag eus ar reuzioù a veze lod pemdeziek o buhez goullo.

Troidellañ a rae ar boliji uhel en oabl hag an tousmac'h a raent a stroñse ar menezioù. Azezet e oa ar jeneral e-barzh e neved hobregonet, par d'ur sant kevrinus. Evel goulaoennoù e-tal ar Sakramant e strinkellige gwechall an taolennoù elektronek a c'holoe ar mogerioù. Devet e oant bet pell'zo en enor da Zoue ar Brezel ha ne chome bremañ ken 'met un nebeut reoù 'zo. Sellout a rae ar jeneral ouzh ar skramm kontroll e lec'h ma weled an tarzhadegoù diwezhañ. Labour mat a oa bet graet. Posupl e oa diskrogiñ bremañ. Gant ur fent seder o tihodiñ war e zremm e sonas ar c'hloc'h a c'halve ar soudarded en-dro. Skuizhus e oa bet an devezh. Torret e oa bet ur c'hanol nukleel ha ne c'hellfe ket bezañ renket. Gwechall e veze graet war-dro an traoù-se gant ar robodoù, met dibaoe ma oant, sac'het o-unan, ne chome den ebet ken evit ober al labour-se ha tamm-ha-tamm e vezent rediet da zilezel an armoù nukleel. Dre-c'hañs e chome c'hoazh un nebeut robodoù-medisin. Elumiñ a reas an deogerez en ur huanadiñ. Ur programm disheñvel a veze dibabet evitañ gant an urzhiaterez. Ne ranke ket ankouaat pep tra evel e soudarded, ha ne veze lakaet da zisoñjal ken 'met ar pep krisañ tout eus ar pezh en doa gwelet e-pad an devezh. Dav e oa dezhañ dalc'her soñj e oant bet kaset e-barzh an amzer da zont evit difenn ar sevenadurezh diouzh ar Varbared.

Un emglev a oa bet graet evit mirout ouzh implij an armoù nukleel e-barzh an Amzerioù Nesañ. Abalamour da se e oa bet kaset an armoù d'an Amzerioù Pell. Met ne oa ket bet doujet ouzh an emglev ha goude an Trede Brezel e oant en em gavet troc'het diouzh o amzer. Ne ouie ket petra a oa c'hoarvezet, met gout' ouie un dra hag a oa sanket don e-barzh e benn gant an urzhiaterez; dav e oa dezhe bezañ trec'h hag adkavet ar mod da zistroiñ d'o amzer evit plantañ en-dro an urzh en he flas ... Achu e oa an abadenn deodegañ. En em santout a rae gwelloc'h. Nijet e oa kuit pouez pounner an devezh. Yac'h e oa ha disammet diouzh e

walleñvoriou. Sevel a reas ... A-greiz-holl e santas e galon o lammat fonnusoc'h e-barzh e vruched. Chom a rae sabatuet; ur gevvidenn a vranškelle a-istribilh dirak an nor. Petra 'oa kaoz? Biskoazh ne oa bet a gevvid d'ur mare ken pell en amzer! Tapañ a reas an amprevan hag e frikas anezhañ e-barzh e vaneg zu.

Achu e oa an devezh. Ur seurt emglev a veze etre an enebourien pa serre an noz. Boas e vezent da ziskrogiñ d'ar poent-se hag a-benn neuze e veze ar gwesped ruz mistri an dezerzh. Bepred e veze graet an tamm diskrog-brezel-se; dav e oa d'ar ganolierien adkavet nerzh en-dro, kuit dezhe daleañ an trec'h ha koll kasoni. Diskenn a raent trema 'n toullou-don e-lec'h ma vefent louzaouet. Eno e kavfent louzou-diskuizhañ, louzou-kousket, ha dreist-holl louzou-ankouaat. Mont a rae Yann, kamm-digamm war-lerc'h ar soudarded all. Ken skuizh e oa ken en em sante un tamm badaouet goude un devezh ken start. Pa voe digouezhet dirak toull an nor e taolas ur sell diwezhañ ouzh an oabl. Marv e oa bremañ al luc'hed a oa tremenet a-hed an devezh e-kreiz ur safar bouzarus. Ne chome nemet koumoul du a save o troidellañ. Ruziañ a raent tamm-ha-tamm en ur en em astenn betek an dremmwel n'halle ket gwelet. A-greiz-holl e verkas un neuz wenn a dreuze ar c'houmoul. Diskenn a rae war-zu ar c'hastell o flapañ gant he divaskell. A-benn e voe kludet war ar voger e tostaas Yann ouzh an dra gant evezh. Ul lapous e oa. Laoskel a reas ur c'hrumuzadenn gant ar souezh. Kerkent e nijas kuit al lapous hag e pignas ken uhel ha boled ur c'hanol. O soniñ e oa ar c'hloc'h. War-nez serriñ e oa an nor. Dav e oa dezhañ hastañ fonnus.

Lampikat a rae eus ur goumoulenn d'eben. C'hoariñ a rae toull-kuzh e-touesk an aour hag ar satin o c'haloupat etre kolonnennoù kotoñs a lugerne gant sked trellus an tan. Pell dirazañ e nije ur mell morc'hup

hag eñ a gae war e lerc'h, par d'un ael, skañv evel ur
 bluenn. Toullañ ha didoullañ a raent ar c'haouedoù
 mogedus, digabestr ha dishual A-daol-trumm ec'h en
 em gavjont war ur gompezenn gris-ludu. Gwez devet a
 save en-dro dezhe. Astenn a raent o skeudoù skrijus
 warne. Pounner e oa deut da vezañ ha poan en doa da
 vale. Flapañ a rae al lapous dirazañ. Kement a boan
 en doa da nijal ma vije bet kredet e oa deut da vezañ
 ken pounner hag eñ. Ur youc'hadenn vraouac'hus a
 darzhas en o c'hichen hag ur pezh koumoulennzu a zeuas
 war wel. Bez 'oa enni daoulagad c'hlas a bare oute.
 N'hellent ket tec'hel kuit hag e kerzhent goustadik
 trema 'n neuz zu, a-enep d'o bolontez. Ur mell genou
 a zigoras, flammoù ruz o strinkañ deuzoutañ. Youc'hañ
 a reas an euzhvil ur wech all hag e lonkas anezhe ...
 Dihunañ a reas Yann. Lammat a rae e galon. C'hwezh a
 zivere war-c'horre e gorf. Sellout a reas en-dro dezhañ
 damzivorfil hag e anavezaz mogerioù teñval e gavenn.
 Gwarezet e oa e-barzh toulloù-don ar c'hastell. Sioul-
 aat a rae tamm-ha-tamm. Klask a reas kaout soñj ...
 Souezhet bras e oa bet gant al lapous gwenn. N'en doa
 ket gwelet hini ebet dibaoc ma oa degouezhet amañ, e-
 barzh an Amzerioù Pell. Soñjal a rae dezhañ ne oa ket
 deuzoute ken zoken. Pegen iskis e oa ! Ma vije bet
 lapoused, pell 'oa e tlefent bezañ bet lazhet gant ar
 bombezennoù petramant ar skinoù fall. Ne rae forzh.
 Aze-giz-se 'oa ha setu tout. Aze-giz-se 'oa, kaer ha
 meurdezus. Digas a rae dezhañ ur soñj mogedus eus ar
 mare ma veve en Amzerioù Nesañ. Ur vuhez disheñvel-
 tre e oa, met ne zeue ket a-benn da ziskoachañ e-barzh
 e vemor ur soñj sklaer deuzouti. N'en doa ket c'hoant
 ankouaat ar pezh a groge da veizañ koulskoude hag e oa
 chomet e-barzh e gavenn hep mont d'an abadenn-deodegañ,
 daoust ma' n defe ranket hen ober. Emichañs ne oa ket
 bet merket gant den ebet. Koulskoude ne ouie ket re
 vat hag-eñ e c'hellfe padout gant ar gwallhuñvreoù.

Beuzet e-barzh ar moged e tihune ar c'hastell.
 Brodet e oa bet dezhañ gant ar brizhc'houlou ur gwisk-
 amant dantelezh arc'hantet. En tu all d'al lusenn e
 tarzhe asambles an deiz hag ar bombezennoù kentañ.
 Kerkent ha laosket o brammoù marvus e veze karget en-
 dro ar c'hanolioù gant c'hwiled gwenn o labourat gant
 jestroù teuk. Ne oa ket mastaret c'hoazh liv gwenn-
 kann o gwiskamantoù, dinamm e oa c'hoazh, hep saotroù
 ruz ar gwad. Parañ a rae an heol ouzh un devezh ifern
 o c'henel. E-unan e-touesk e amezeien, e farbote
 Yann e damm labour. Gwall c'hilac'haret e oa o welet
 e gamaraded ken seder tra ma grogent gant un devezh
 a vefe ken kriz ha ken kalet hag an hini tremenet .
 Kompren a rae bremañ perak e veze mod-se bemdeiz hag
 e chome hamet dirak galloud an deogerez a c'hoarie
 gant spered an dud evel ma ra ur poder gant e bri.
 Ken aes e oa bet koulskoude bruzunañ ar chadennoù a
 huale e spered ! Ha ne oa ket bet diskoachet ar
 wirionez biskoazh, gant den ebet ! Met ne gave ket
 ken aes an traoù bremañ peogwir ne c'halle ket gou-
 zañv ken ar c'hoari-foeltrañ kaset en-dro gant an
 ardivinkoù kig. Soñj en doa eus ar gwad o tiverañ
 deus ar c'horfoù mac'hagnet a veze kaset trema 'n
 toulloù-don, gourvezet war ar c'hravazhioù. Soñj mat
 en doa eus ar falc'hadenn a oa bet graet gant an
 Ankou an deiz a-raok ha ne faote ket dezhañ bezañ
 sammet e-barzh karrigell an Anaon. Yaouank e oa,
 kalz re yaouank evit mervel. Sellout a reas ouzh ar
 soudarded all a veze o kontañ kaoz en ur gargañ beg
 ar recheterien-tan : "Brav eo ur mintinvezh nevez-
 amzer memes-tra !" "Bravoc'h 'vo c'hoazh pa vimp
 distroet d'ar gêr" "Ya, 'benn div pe deiz sùn 'vo
 achu ar brezel, 'benn neuze e c'hellimp distroñ du-
 mañ". Genaoueien ! Dav e oa dezhañ tec'hel kuit !
 Den ne selle deuzoutañ, n'en doa ken met profitañ !
 Laoskel a reas an emgann hag ez eas d'en em goll e-
 touesk ar moged. Aze e oa al lapous o c'hortoz
 anezhañ. Ne c'helle ket nijal ken. Devet e oa bet

A R B A R A D O Z

Strakal, flastrañ, torriñ, drilhañ, bruzunañ.. Krogiñ a ra an tan e-barzh ar wetur. Deut eo brav ganeomp. N'eo ket sur e teuint a-benn da bareañ ar paotr. Un tamm gwallgaset eo bet. Diwadañ a ra e fri hag e zivskouarn... Achu e vo gantañ ma ne gavont ket anezhañ abred a-walc'h. Unan nebeutoc'h. Emañ Owan ha Youenn o tihanañ d'ober o stal d'an daou flik a oa gantañ. Ur soñj mat e oa laerezh ar gwerniz-se e-barzh ar stalier... N'eus ket e bar evit diskar ar c'hirri....

Tididi tididi tididi Setu ar re all !
Poent eo deomp sachañ hon skasoù !.....

--

Hailhoned, ma breudeur, Rouantelezh an Ezhomm-eien, ma bro. Riboulioù teñval, flaer an dienez gante, dourioù lous, relegoù vreinañ enne. Neuzioù en o c'hoazez war balennoù kozh, dislivet ha saotret, a-strew en-dro d'an oaledoù. C'hwez mougus o sevel a-ziwar an tantadoù keuneud plastik. Dañsal a ra an tan. Liv melen, liv glas, liv ruz ha liv du, gwad ha poanioù Livioù mesk-ha-mesk o taolenniñ bedoù dianav, o tresañ esperañs guzh ur gwir vuhez ?.....

Trouz ha kaniri a sav a-ziwar ar c'hamp. Bug-ale sabatuet a bar o daoulagad war ar re gozh o


tibunañ marzhoù ar Bed Kozh. An avel, ar mor glas, ar gwez, ar frouezh, frond ar bleunioù,.... ar vuhez ... Bez 'ez eus bugaligoù all o c'hoari gant ur paour kaezh razh, kollet e hent gantañ. Yaouankizoù o kantañ o freizhadegoù hag o zaolioù-kaer... Paotred ha merc'hed o kanañ. Klemmganioù ha gwerzioù, sonerezh skiltrus ar fleütoù

Lammat a ra kalon rouantelezh teñval an ezhomm-eien. Birvidik eo kavier don ar gêr-vras, satanezet gant meuriadoù kantreerien, miliadoù anezhe, tud dister ha didalvoud, e-maez "o c'hevredigezh".

Tremen a ran ma dorn war gof Gwenn. Pegen flour he c'hroc'hen ! Diskenn a ran goustadig etre he divorzhed. Pegen plijus eo flourañ ar voulouz aour o lugerniñ dindan skinoù tomm an heol. Heol !, nerzh ha braventez, gwrez ha kened ! A !, c'hoari a-sambles ganti, ni hon-unan, ken 'met an heol o tiwall ouzomp ...

Ur sizhun 'zo omp tec'het kuit diouzh toulloù-bac'h ar gêr-vras. Dilesket hon eus riboulioù teñval ha flaerius hon c'havell evit ober anaoudegezh gant splannder gouez an Natur difennet.

Ar c'havioù don, ifern ma bugaleaj. Soñj am eus c'hoazh eus ar wech kentañ oan aet betek estajoù uhelañ ar gêr. Pegen kaer e oa deomp, mibien ar "razhed", boas ma oamp ouzh teñvalijenn ha flaer ar c'havioù. Gouleier, tan trellus an tredan, luc'hed ar c'hirri o tremen, mekanikoù o rouzmouzañ. Goulou ruz, goulou gwenn, goulou melen, goulou glas, baradoz al livioù. Bamet e oamp holl gant ar bed nevez-se, gant o bed dezhe... Tud gwisket du a zo deut betek ennomp, tizh gante war o c'hezek tredan. Gouleier ruz o deus strinket diouzh o dorn kleiz ha kouezhet zo daou



pe dri ac'hanomp. Youc'hal a raemp, yudal a rae ar re c'hloazet ... Lazhet eo bet an holl re n'o deus ket kavet un toull evit kuzhat ennañ.

"Arabat mont d'ar Gêr-Uhelañ" a lare ar re gozh. Ne oa ket hon bed deomp-ni. Gwechall e oa bet koulskoude, er penn-kentañ, pa oa labour d'an holl ...

Kaset e oa bet un deiz, hon tadoù-kozh d'ar c'havioù don. N'o doa ket o flas e-barzh ar gevredigezh. Ur plas, ul labour a oa da bep hini, arabat e oa d'ar re n'o doa ket, debrñ bara ar re all. Setu, e-barzh riboulioù estajoù izelañ ar gêr e oant en em gavet. Boued a veze kaset dezhe bep an amzer gant aon na savfent a-enep da urzh ar Gêr-Vras. Arabat e oa deomp mont e-maez hon toull, ha graet hon doa koulskoude, ha dalc'het e veze d'ober !

En em silañ a raemp betek ar Gêr-Uhelañ evit torriñ, drailhañ, bruzunañ, lazhañ, veñjañ hon breudeur a-veze lazhet bep tro gant beg-e-dog. Plijadur a oa, kalz muioc'h evit na oa gant ar razhed ez aemp da chaseal e-barzh ar riboulioù teñval.

Met arabat e oa ! Arabat e oa mont e-maez kêr ivez, mont dindan an heol, koulskoude

Aet e oamp skuizh, Gwenn ha me, gant ar c'hoari-ou gwadek, gant an deñvalijenn, gant an toull-bac'h. C'hoari an eil gant egile, an heol o parañ ouzhomp, a faote deomp ober. An Heol ... an hini a veze kaoz deuzoutañ e-barzh istorioù ar re gozh, ar voull-dan, kreñvoc'h he sklerijenn evit brasañ gouleier ar gêr uhelañ. An heol e oa arabat mont da welet anezhañ, an heol a bare bremañ war ur vro devet, drastet sañset, pa oa ken kaer anezhi gwechall, a lare ar re gozh, distrujet ar gwez, ar bleunioù, disec'het ar mor, al

lennoù, skarnilet ar parkeier glas, drastet an Natur, dismantret an Douar da viken. Ha neb a gredfe mont da welet e vije devet e gorf gant an doueed kriz a zo o chom eno, Ach, Neutron, Kobalt, hag an holl re a vev e-barzh lez Nukleel, an Doue Meur. Aet e oa bet e fulor gant pec'hedoù Mab-Den ha troet en doa ar bed e ludu. E-barzh ar c'hondonioù e ranke bevañ an dud di-baoc, evel razhed.

Aet e oamp skuizh gant buhez ar razhed, setu, aet e aomp da gin an doueed, a-benn c'hoari an eil gant egile dindan splannder an heol. Ha n'eo ket un ifern skarnilet hon eus kavet, ur baradoz burzhudus an hini eo, par d'an hini a oa gwechall a-raok ma afe droug en doueed.

Kredet hon eus mont da gin an doueed ha kavet hon eus ar baradoz

Tridal a reomp gant ar blijadur. Redek a ra takennoù arc'hant war c'horre hon c'horfoù. Stok ha stock e lidomp adsav ar vuhez e-touesk an natur nevez. Daskrenañ a ra brankoù ar gwez meur gant an aezhenn frondus. O, Natur Nevez ! Klevet a rit hon trid ? Ho meuliñ a reomp gant hon lid ! Heol, Oabl, Koadeier, Maezioù, Testoù nemeto hon ebatoù ! Gouel bras a zo ganeoc'h, C'hwi, gwisket en Ho kaerañ, digemerit hon Aberzh ! Bleunioù ruz, bleunioù melen, bokedoù glas, bokedoù roz, c'hwez ar baradoz ganeoc'h, c'hwez an orged ganeomp. Strinkañ a ra ho livioù ... Strinkañ a ra ma buhez

Plijadur ar c'hig, plijadur ar c'hwesa, plijadur ar c'hleved, plijadur ar gweled

Pemzekteiz 'zo omp degouezhet e Bro an Doueed. Pourmenadennoù hir a reomp a-dreuz ar c'hoadeier. Tañvañ a reomp frouezh a-bep-seurt. Poan gof hon eus tapet meur a wech, gant ar re-se, met desket hon eus tamm-ha-tamm, peseurt re a oa ar re wellañ.

Mogerioù kozh a gavomp a-wechoù, man ha kinvi warne. Taget int a-nebeudoù gant ar raden hag ar gwez. A-barzh pell ne vo ket ken eus an dismantroù-se a zo roudoù diwezhañ Ren Mab-Den war c'horre an Douar. An doueed n'hon eus ket kavet anezhe 'vat. Marteze, n'eus ket deuzoute hag int ganet e-barzh spered ar re gozh, evel an dezerzh traezh ha maen a oa da vezañ aze, sañset.

Plijadur ar c'havadenniñ ! E-barzh pep korn eus ar c'hoadeier e kavomp bokedoù, frouezh, gwezigoù e bleuñv. Pegen brokus, pegen burzhudus eo an Natur ! C'hoari a reomp an eil gant egile war balennoù kinvi, e-barzh beg ar gwez meur, war-c'horre ar reier devet gant an heol ...

Ur blijadur nevez eo bewech, frondoù nevez, santadoù nevez

Ur miz 'zo omp aet e-maez ar Gêr-Vras. N'hon eus ket kavet an doueed met gante omp bet kavet ! Emañ Gwenn e ma c'hichen, a-c'hourvez war ar c'hinvi tomm-heoliet, marv eo

Pemzekteiz 'zo ez omp bet skoet gant an doueed. Devet eo bet hon c'horf tamm-ha-tamm gant poanioù euzhus a groge e-barzh ennomp gant kementa nerzh ma n'hellomp ket ober netra evit o distanañ.

N'hellan ket fiñval ken gant an tan a zo ennon.

Gortoz a ran bezañ laeret ma buhez gant an Ankou.

N'eo ket bet gwalc'het pec'hedoù hon tadoù-kozh c'hoazh Emañ atav ar skoared warnomp

An nerzh a gavan evit digoriñ ma genou ha huchal a ran ken kreñv ma c'hallan :

"Doue Nuklee1, Tadoù-Kozh,

Kas 'm eus ouzhoc'h "

Meurzh 81

... Gwelet a ran ma skeud e-barzh ar melezour. Ken drouklivet on hag un teuz. Spontet mik on gant toull-
où ma daoulagad o tebrin tamm-ha-tamm ma divjod gwenn.

Ar c'hoazh a wele ivez. Emañ atav ar skoared warnomp

A N K O U

Pegen teñval eo. N'eus nemet troellennoù ar skeudoù gris a c'hell pellaat dremmwel ma bed kloz.

Soñjal a ran, a-wechoù ez on ur verienenn, tapet ganti penn an hent kuzh a gas d'ar vuhez disheñvel, d'ar vuhez a zo en tu-hont d'ar mogerioù euzhus-mañ.

Dirazon ar voger. A-dreñv din ar voger ha diouzh an tu dehou ha diouzh an tu kleiz...

Abaoe pegeit emañ aze ? Mizvezhioù, bloavezhioù, kantvedoù ? Abaoe pegeit n'on ket en em astennet war ar geot dindan an oabl glas, abaoe pegeit n'am eus ket klevet an eostig o kanañ ? Pell 'zo n'am eus ket debret e-leizh ma c'hof kennebeut. Pa zigouezh boued din n'eo ken soubenn yen, blaz ar re nebeut ganti ha c'hoazh ... A-boan eo ma c'hellan debriñ anezhi gant al loustoni hag ar c'hwezh a zo en-dro din. Yen eo an darioù skalfet da ma zreid.

Gwelet a ran ma skeud e-barzh ar melezour. Ken drouklivet on hag un teuz. Spontet mik on gant toull-
où ma daoulagad o tebrin tamm-ha-tamm ma divjod gwenn.

E-barzh teil ma blev ha ma barv hir e klask bod an astuz. Skrampañ a reont a-hed ma c'horf o kuzumiñ noz ha deiz, an nerzhioù diwezhañ am eus gallet

espern. Gwelet a ran ma c'hostezennoù kenkoulz ha ma na vefe ket ma c'hroc'hen warne.

Ar c'hloazadenn a welan ivez. Entanañ a ra an hanter eus ma bruched. Ken bras ha ma skudell eo. Soñj am eus eus ar mare ne oa ket brasoc'h eget ur pezh moneiz met n'en deus ket dihanet da greskiñ dibaoc, evel ma vije bet un drenkenn o krignat ma c'hig tamm-ha-tamm. Roz-gris eo tro-war-dro, koeñvet ar c'hroc'hen. Ruz-flamm eo ar c'hig, evel ur gouli na vefe ket kiget mat. E-greiz, e-lerc'h m'he deus kroget ar boan, ez eus bremañ un toull du, lin disliv o tiverañ dioutañ. Ne oa ket deut din na draet na balastr evit distanañ ar gouli Ne c'hellan ket treiñ ma selloù diouzh adskeudenn ar melezour. Ne c'hellan ket treiñ kein ouzh arvest ar c'hloazadenn, ouzh gadaliezh ar c'hig-se, rukunus ha hoalus war un dro.

Ur vojenn eo ar bed a zo bet a-raok, ur moull goull ha kleuz n'eus netra evit e leuniañ. Ne chom ket tamm danvez ebet d'ar bed a zo bet a-raok. Un den e oan e-barzh ar bed kent, ur vicher am boa, en ul lec'h bennak e oan o chom. Hag ur wreg a oa din, bugale, ur c'harr-tan, mignoned, enebourien? Ha petra c'hoazh ? N'am eus ket soñj eus netra ken. Deut eo an ankounac'h. N'am eus ket klasket ankouaat, deut eo e-unan e-giz-se, evel an deñvalijenn o kouezhañ war ar maezioù pa guzh an heol. E-barzh an deñvalijenn-se eo en em gollet steuñvenn ma buhez en he fezh. Ne chom din nemet damsoñj ma fersonelezh na pa vefe kentoc'h mogedus, kemm-digemm. N'ez eus eus ar peurrest nemet un douar beuzet e-barzh mor ar vemor. Ur wech an amzer e c'hellan tennañ un tamm eus ar mouch, reiñ buhez d'ar mojennoù, adkrouiñ an amzer dremenet, teurel un tamm sklerijenn ouzh ma buhez kent, hep din gouzout perak ne zeu nemet ur bed mogedus, distumm, disliv, dizanvez. Bevañ a ran



e-barzh ur grogen gloz, kollet ganin heklez ma buhez kent. Kavet a ra bod ma memor e-barzh an huñvreoù hag ar sorc'henoù. Krouiñ a ran bedoù a zo diouzh ma doare din.

An noz dremenet em eus gwelet neuz ur vaouez, stok ouzh ar voger. Diouzh peseurt korn teñval eus ma is-emskiant e teue ar stremm-weladenn-se ? Met etrezek ennon eo deut. Gwelet a rae ac'hanon. Ne ziwane ket diwar ma ijin. Gwelet a raen anezhi, bras, moan, he c'horf ouesk, he blev rouz en-dro d'he dremm hir, he bronnoù start bannet en-a-raok, kuchenn rous he moudenn....

Dirazon e oa, chomet a-sav hep laret grik. He skoaz am eus touchet met n'eus ket bet respont ebet. Kaozeet am eus dezhi met mut eo chomet. Bev e oa koulskoude. Stankoc'h e oa an aer en-dro dezhi, fulennoù en em zaspugne, karget e oa an aer gant tredan. Nerzhioù misterius a geje war-c'horre he c'horf ; marc'hegiñ a raent gwagennoù, kevrinus o zreuzadennoù, ganet diwar ataladurioù o termeniñ keñverioù dianav ha diveizus, etre he c'horf hag he endro. Trellet e oa ma daoulagad gant ar fulennoù o tañsal. Pa en em lazhas o sked ne chome den ebet ken. Huñvreet am eus ?

Deut eo en-dro. Gourvezet e oa war ma gwele. Endro kloz ma c'harc'har, hollved oc'h en em astenn, planedenneg o treiñ en-dro d'he c'horf noazh o skignañ e sklerijenn e-barzh ma buhez.

C'hoariet am eus ganti, e-lec'h m'en em gav an holl nerzhioù a zo evel ur steuñvenn en-dro dezhi.

Mentioniezh hedro he c'horf. Savadenn kemm-digemm al lunoù treset gant he fiñvadennoù. Emañ a-c'hourvez war ar vatarasenn c'hleb ha me, war ma fenn daoulin, ma fenn etre he divorzhed digor frank, savet en nec'h. Sellet a ran pell, pell, en tu all da strouezh he moudenn, da gomezenn he c'hof, da duchennoù he divronn, da garreg he fenn

Klevet a ran ul leñvadenn, ur c'hlemmigan o troiñ en ur ronkell ha netra ken. Ne chom nemet an astuz war ar vatarasenn vrein.

Bez ez eus anezhi koulskoude. Klevet a ran he anal e-pad an noz. Krediñ a ran a-wechoù eo ganet diwar yeunoù ma is-emskiant. Trawalc'h eo din tremen ma dorn war he c'horf evit gouzout emañ aze. Hag un touell e vefe ? Ret eo din dihuniñ anezhi neuze, kemer anezhi etre ma divrec'h, divorfilañ ar c'hoant-egezh-a zo ennon. An ezhomm-se a oar konfortiñ ac'hanon. Gouzout a ouzon ne vezan ket oc'h huñvreal Santout a ran he genou war ma c'hof, he muzelloù glizhek o serriñ en-dro da ma fidenn. Un dra fetis eo ar blijadur hag e ouzon neuze n'eo ket kollet ma skiant ganin.

E-barzh ma c'houk em eus gwelet ar bed diavaez. Ar mor glas, ar c'hoadeier, al lapoused, ar vuhez... Maged o sevel pa guzhe an heol, gorre ar mor saotret o tiskargañ bandennoù pesked brein war an aoc'h du ha gludek ; ur babig aet e glaou. Tud war o zremenvan, o glozadennoù astennet dindan an heol hag ar c'helien, ur mousc'hoarzh war o fas kuñv, kuñv.....

Tud o vont a-hed straedoù ar c'hêrioù bras, o kerzhet diyoul, evel teuzioù, evel robodoù Kirri-nij o troidellat en neñv par d'ur bagad lampikerezed o strakal ... Paotred o mantilli glav o tont da bakañ an dud e-barzh o gwele abred diouzh ar mintin... Rizennadoù korfoù marv distreset, berniet war vord an toulloù-bez ... Hag ar vaouez rous, en noazh, krignet he c'horf gant al loventez o tebrin he c'hig tamm-ha-tamm, o troiñ anezhi en ur relegenn distumm. Mein an dezerzh troet e gwer. Tonennoù betoñs, dir ha gwer kendeuzet e-barzh un ifern divuhez. Bed ar vuhez aet d'ur bed mein.

Ma fas am eus gwelet e-barzh ar meleziour hag hi o kovezhañ a-dammoù evel ur voger o tisac'hañ goustadik dre nerzh an dinamit.

Dihuniñ am eus graet. Ma-unan oan war ma matarasenn vreïn

Tarzhet en deus ma bed kloz. Torret eo ar voger Digoret he deus un nor e-barzh ma c'harc'har....

Aet on maez. Kantreet am eus a-hed ar riboulioù teñval, e-kichen neuzioù reuzeudik, korfoù treut, mac'hagnet, gorus. Mont a raemp pep hini diouzh e du hep gallet torriñ karc'har hon spered na pa oa digor hon toullbac'h mein. Troiñ ha distroiñ a raemp, diemskiant ha diyoul

Mont ha dorf evel razhed

Hag an nor vras am eus kavet Met ar bed diavaez n'eus ket deuzoutañ ken. Ken tachennoù de- vet, troet e gwer o gorre.... stêrioù disec'het, reier teuzet o strinkellikat ...

Livioù melen, rous, yell, gris, du... Ha den .. an dezerzh, ur c'harc'har nevez, ar bed holl : ur prizon goullo

Kouet eo an heol war an douar. Ne welan ken gwez devet, geot krazet, tiez drailhet. E pep lec'h emañ merk an distruj War ma c'horf zoken Koll a ran ma blev Ma c'hroc'hen disec'het ha ma gloazadenn ...

Poanioù kalet meus anduet. Mahun on gant ma gloazadenn o vreïn .. Ul loen a santan ba ma c'horf, ur sar pant vil. Gwelet 'ran e benn a-wechoù e-barzh toull ma bruched. E zaoulagad tan hag e zeod o fistoullat. Pep tro ma chañch plas e santan e lost o fichal, o foetiñ ma bouelloù.

Flaer zo ga me c'hig breïn. Poan benn meus ha riv ken e krenan noz ha deiz. Teñval eo an noz. N'eus ken ar gouleier a welan a-wechoù o fichel dirak me dawlagd. Klañv bras on meuzon.

Gwel ran traoù o fichel. Ar zarpen meus klas- ket lao. Gwelet ren e benn o fistoul ban toull. Me dorn meus fourret bars, sachet meus potpaour. Start oa. Poan meus bet. Gwad zo bet, laet meus nezañ kazhi sur. Da ke gwelloc'h a ze ganin koulskoud.

Nalan ke kousket kin. Sterde. Mehun on gan traoù. Drol int da velet. Brao eo, traoù ru, traoù glas, meln...

Me soñj din on digouet bar baradoz a-wechoù,
ma ne viye ket ar boan-se.

Krog ar boan ba me bouelloù. Fler zo papret.
Ar foerel meus tap. Me lar dac'h, lous e.

Me zo c'honde grevi kazhi sur.

Riou meus. Ma otonn beneubt

Neñ rous meus gweld opaseel

Manhon devertl ; goudoun mat ...

Ahaouedur aede glaou ...

Me ke pel karigl n.....

DAOU BRENESTR DIGOR WAR UR BED HUD

Ne veze ket kalz traoù d'ober diouzh an noz
met e-barzh ti Soaz ar Born e veze kavet un tamm pli-
jadur memes tra. Aze en em gave paotred ha merc'hed
evit kontañ kaoz en-dro d'ur banne, evit bezañ asam-
bles. Klouar e veze an ostaliri. Ur c'horadenn vat
a dan o strakal e-barzh an oaled ; mil fulenn o tañsal
ur jabadao dirollet : mil luc'hedenn o tresañ skeudoù
misterius war c'horre ar mogerioù mein hag ugent
latenn distanet gant ar bier hag ar gwin. Ha Soaz o
vont ha dont, o tiskargañ pep a vanne hag o skignañ
levenez.

Met an nozvezh-se ne voe ket evel ar re all.
Ne oa ket dek eur c'hoazh pa zigoras an nor. Ur
barrad avel a dreuzas an ti hag ez antreas "An Hini
Kozh". "An Hini Kozh" a oa bet graet deuzoutañ
diouzhtu na pa ne oa ket voaien gout hga-ef e oa kozh
pe yaouank na zoken hag-ef e oa paotr pe blac'h ! Ur
vantell hir a oa war e gein, unan du pod a skoache e
gorf dindan e bastelloù. Ur c'habell a guzhe e benn
ken na c'helle den gwelet e fas. Mont a reas goustadik
da azezañ e-barzh ar c'houign. Yac'h e seblante bezañ
c'hoazh ha n'en doa ket ezhomm eus bazh evet. Den ne
lare grik hag an holl a selle a-gorn ouzh an hini
nevez degouezhet. Azezet e oa bremañ e-kichen an tan
mut, hep fiñval e mod ebet, o sellet ouzh arvest ar
flammoù o tañsal e-barzh ar siminal.

Den n'en defe gallet laret e-barzh petra

e soñje. Aon ha doujañs a oa tremenet e kalon pratikoù Soaz. Un dra nevez a oa degouezhet en o femdeiz, un dra dic'hortoz hag an holl a chome mantret gantañ. Gwir eo ne voe ket an nozvezh-mañ evel an nozvezhioù all. Pep hini a grede dezhañ bezañ spiet ha den ne grede laret poz ebet.

An deiz war-lerc'h e seblante ankouaet an hini kozh. Ha pep hini da varvailhat evel boaz ha da zistanañ e c'hourlañchenn. Met ne oa ket dres evel kustum memes tra ha dre ma dremene an amzer e ouie pratikoù Soaz e vefe gwelet an hini e oant holl o c'hortoz gant strafuilh. Lod a grede damwelet anezhañ a-wechoù, just ur pennadig hag e verzent ne oa nemet maged ar siminal. An amzer o vont e-biou e tisec'he al latennoù, pep hini d'e dro a daole ur sell prim ouzh an nor, bep an amzer. Dre forzh gortoz e kreske un enkrez digomprenus e kalon an holl bratikoù ken ne voe tamm souezh ebet pa zigoras an nor en ur vigourat. "An Hini Kozh" a yeas tre hag ez eas da gemer e blas e-barzh ar c'houign

Aze e chome evel an deiz a-raok mut ha difiñv. Hag an holl da c'hortoz ... Da c'hortoz petra ? Den ne ouie. Gout ouient holl koulskoude e oa un dra bennak da c'hoarvezet ?

Pa sonas hanter-noz e tennas ur fleüt arc'hant deus e c'hodell. Hag e krogas da soniñ Un ton iskis a leunie an ti. Un ton na oa ket bet klevet gant den ebet c'hoazh. Pell tre e oa deus ar gensoniezh e vezed boaz outi. Ur sonerezh burzhudus ha marzhus an hini oa, luskadoù rouestlet kenurzhiat en ur mod dispar. C'hwezh an avel a c'hwitelle enni, deilioù o kouezhañ war ur pallenn kinvi a vouge notennoù 'zo, sonioù ar c'hoadeier a dregerne, geiz al laboused bannet d'ar seizh avel, richan ar gwazhioù o redek, arlivoù diniver ar c'hlasvez distaget en ur gensoniezh dianav ha link. Luskoù dirollet, meulgan-

ioù meurdezus, klemmganioù skrijus kemmesket en ur sonadeg-veur a ranne kalon ar selaouerien.

Pa baouezas ar sonerezh e chomas bamet an holl bratikoù. Biskoazh n'o doa klevet un ton a zihune kement a drivliadoù dianav e-barzh enne. Dinerzh o c'horf, teneraet o c'halon, daeroù o redek war o div-jod e choment sabatuet o parañ war ar skeud a oa bepred e-barzh ar c'houign. Sevel a reas goustadik hag ez eas e-maez. Lod a gredas damwelet e fas neuze. Hini un den kozh ne oa ket. E-lec'h ar roufennoù e oant o c'hortoz e weljont ur c'hroc'hen flour ha gwenn. Ur plac'h yaouank an hini oa...

Fañch, daoust ma oa aet diwezhat d'e wele ne deve ket ar c'housked dezhañ. Ne zihane ket da droiñ ha distroiñ en e wele ha da chañch tu d'ar golc'hed. Tregerniñ a rae e-barzh e benn son iskis ha burzhudus an hini en doa gwelet en ostaliri. He fenn en doa gwelet; he dremmoù ken kaer, he c'hroc'hen flour ha gwenn. Sot e oa aet ganti ken na c'helle he skeudenn kuitaat e zaoulagad. Burzhud ar sonerezh. Hoalerezh ar plac'h. Trivliadoù hud, ur marzh santout anezhe o tremen en e galon, o rannañ anezhi, oc'h evañ e wad, o tinerzhañ e gorf

Hag eñ, aet e-maez e wele, aet da gin an hini a c'halve anezhañ, aet da zispenn he roudoù, a-benn adkavet hoalerezh he sonerezh.

Hed an noz, hed an deiz e kerzhas dre ar vro. Den n'en doa gwelet unanig bennak, ur vantell zu ganti. Krog e oa ar riv en e izili hag an dic'hoanag en e galon. Klask, furchal, goulenn hep kavet netra, mann ebet

N'en doa ket debret tamm pa ne vefe un aval pe ur berenn bennak laeret e-barzh ur wezenn. Pell oa dija e oa kuzhet an heol. Poent oa kavet bod ha gwrez evit an noz. Broudet gant an naon ez eas etrezek un ostaliri. Aze e vefe kavet bara ha hier, gwrez ha diskuizh.

Echu e bred gantañ e oa e soñj goulenn hag-eñ na vefe ket plas evitañ e-barzh ur c'hrañj pe ul loch bennak. Ne oa ket savet c'hoazh pa zigoras an nor hag ez antreas plac'h ar vantell zu. N'eo ket war-zu ar c'houign ez eas ar wech-mañ met etrezek ennañ.. Azezañ a reas ouzh an daol, e-tal dezhañ, hep laret grik. Chom a raent mut, an eil o sellet ouzh egile. Gwelet a rae he daoulagad c'hlas, daou brenestr digor war ur bed hud ... Un draig bennak en dije bet c'hoant da laret dezhi, displegañ perak e oa aet war he lerc'h, abalamour da betra en doa klasket anezhi met ne deve ket poz ebet. Bout e chome o sellet outi hag hi mut, o sellet outañ

Ne vije ket bet Fañch evit laret e-pad pegeit e oant chomet e-giz-se. Chomet e oa an amzer en e sav. Ne oa ket eus ar bed ken, nemet an hini a oa o parañ e-barzh an daoulagad hud a vefe. Ne vije ket bet evit laret kennebeut pevare e krogas ar sonerezh, adalek pegoulz ez en em gavas e-barzh un hollved notennoù burzhudus. O nijal e oa e-touesk talmerezh-ioù-son kemm-digemm o kempenn gwagennoù, marzhus o ataladurioù ... Stirlink ha storlok, richan ha geiz, soroc'h ha boud, strak ha tregern, bourboulh ha saflik, sklintinerezh ha c'hwitellerezh. Kement a sonioù, kement a notennoù, an eil o respont d'ar re all en ur sonadeg boemus. Skeudennoù kevrinus a dre-mene dirak e zaoulagad. E-barzh ur bed all e oa, skrijus ha burzhudus, ur bed n' eus ket poz ebet evit taolenniñ anezhañ. Tridal a rae e gorf. Beuzet e oa e spered e-barzh ur mor a drivliadoù. Koll a rae e holl nerzh. Tost da semplañ e oa. Debret gant ar

muzik, evet e wad gant hud ar sonerezh...

War an aod ez en em gavas a-greiz-holl, hep dezhañ gout penaos. E-barzh teñvalijenn un draezhenn e oant o daou, hag hi, delwenn arc'hant war-sav e-barzh an avel, troet war-zu ar c'herreg meurdeus hag ar mor dirollet. Un dudi e oa gwelet he c'horf stummet kaer, he divronn sonn beget lemm foetet gant an avel vras. Tostaat a rae deuzoutañ. He divjod gwenn, he daoulagad c'hlas o parañ ouzh e re, he muzelloù diwad kenniget d'e re. Pokat a reas dezhañ.. Teod flour ha nerzhus evel ur skourjez. Riklañ a rae e zorn war he divskoaz hag a-hed he c'hein en ur stardañ he bruched arc'hant. Teod, muzelloù, hal, holen, anal yen..... Yudal a rae an avel, sourral a rae tonnoù ar mor..... hag int kroc'hen ha kroc'hen.... Pegen kaer eo ober anaoudegezh gant ur c'horf all meudad ha meudad Flouradennoù, plij-adur ar bizied Moudenn flour ha tredan Roc'hal, hirvoudiñ En em silañ a reas e-barzh he c'hourz degemerus..... Krogañ a reas e-barzh e c'houg... Hentoù digor d'an orged. Tre ha lanv... Sper ha gwad. Tarzh an orged. Trid ar c'horfoù.. Tredan ha hud.

Sioul e oa ar mor, sked an heol o kuzhat o strinkellikat ennañ. Ar c'herreg bras a daole o skeud war an draezhenn. Lugerniñ a rae ur fleüt arc'hant war an traezh. A-c'hourvez en e gichen e oa korf un den, ur c'horf dislivet evel ma vije bet taolet gant ar mor goude bezañ bet evet e wad gantañ. Digor bras oa e zaoulagad, daou veleour luf o parañ ouzh an oabl mouk, daou brenestr digor war ur bed hud. Kaer en doa bet parañ an heol a-hed an devezh ne oa ket deut a-benn da dommañ ar c'horf yen skorn.

Pa voe kuzhet ar sterenn e-barzh he liñserioù tan e krogas ar bizied diwad da fiñval koulskoude. Ur vrec'h a blegas, e benn a savas

Sevel a reas goustadik, liv gwenn e groc'hen
o skediñ dindan sklerijenn al loar. Ar fleüt arc'hant
a dapas. Soniñ a rae un ton burzhudus a dregerne en-
dro dezhañ dre ma bellae diouzh an aod.

Miz Here 1981

